

Guennou Charles

[Charlez Frañsez Gwennou) (Talhounarn)

(Lezardre 1851 – Vitry-sur-Seine 1915)

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Ne skriv ket Gwennou brezoneg evel ma veze distaget e Lezardre, nemed gwechou 'zo. Implijoud a ra "hen, her, hel" pa implijom bremañ kentoh "e" (ragano). Ober a ra gand doare-skriva Ar Gonideg. Gwechou 'zo ez eo galleg e ereadurez.

Bet embannet e 1895.

Maro ar roue Morvan¹

O Britannia dulcis,
Te, veniente die, te decedente, canebam !²

Kenta gwerz

I

Karl-Veur³, goude beza bet o vale e hloar
Adaleg an Oder hag an Danub⁴ d'al Loar⁵
Goude beza gantañ meur a roue trehet,
Ha dindan e lezenn kalz a boblou pleget ;
Goude beza devet pe taolet d'an douar
Templou an Idoled, savet kroaz ar Halvar
En o leh, e peb bro : Karl-Veur en em gavas,
Eun deiz, Roue ar bed... Ha, kaerroh a zo c'hoaz,
Ar bed hen enore 'gozig evel Doue !...
Ne oa Mestr nemetañ ! Roue, pobl a zente
Gand hast ha doujañs vraz ouz e hourhemennou,
An douar a grene dirag e hourdrouzou !...
Eun devez, war e dron, Karl ar Meur azezet,
E gleze en e zorn, e benn gantañ soublet,
A oa oh eñvori, o trei en e spered
An oll draou burzuduz, betek-henn gantañ great⁶,
An oll draou burzuduz en-doa c'hoant d'ober c'hoaz.

« War ar bed, emezañ, ne oe gwelet biskoaz
Roue galloudusoh ha brasoh evidon...
Pa gomzan-me, dre-oll e klever ahanon !

¹ **Morvan** : Rener ar Poher e oa, hag, hervez leoriou istor, e sente an oll Vretoned outañ. Lazet e oe e 818

² Bet troet e galleg. Breiz, bro dous, kana a ran ahanout a-benn tarz-an-deiz, Pa deu an noz, te an hini eo a gan c'hoaz ma mouez !

³ **Karl-Veur** : Carolus Magnus, bet lakaet impalaer e 814 gand ar Pab.

⁴ **Danub** : Danao e brezoneg

⁵ **Loar** : Adskrivet e brezoneg an ano galleg. Al Liger

⁶ **great** : greet. Stumm Leon bet miret evid ar rim.

Ma hoant a zo ma reiz, ha skeud ma hurunenn
 A ra d'ar Rouanez krena gand an anken...
 Karl-Veur eo ma ano ! N'edon biskoaz trehet,
 A-drugarez Doue ha nerz ma zoudarded...
 Ha koulskoude din zo lavaret n'eus ket pell
 Ez eus eur vro du-hont, heh ano Breiz-Izel,
 E fell dezi dalhmad terri ma gourhemenn,
 Ober goap ahanon koulz hag euz ma lezenn !...
 Bro divez, diskiant ! War ma meno, tud Breiz
 A lamm eur galon dir hag houarn en o hreiz...
 O mor hag o hoajou o diwall... O Roue
 A zo eun den dispont, ha karet eo gante !...
 P'o galvo d'an emgann, an Arvor, an Argoad
 A zavo a-unan, ha, neuze, nag a wad
 A vezo skuillet c'hoaz !... Impalaer ha Roue,
 Me, Karl-Veur, am-eus spont, pa zoñjan en dra-ze !
 Petra ober, siwaz ?... Kastiza Breiz-Izel !!!
 Kastizet e vezo, ha ne vezo ket pell,
 M'hen tou dre ma hleze !!! »

Kriza a reas e dal,

Ha pa zavas e benn, e Varoned, raktal,
 A dostaas outañ, doujuz ha diskabell :
 « It, emezañ, va zud, it prim da Vreiz-Izel !
 Deskit d'an dud ouez-se n'eo ket mad ober fae
 Diwar-benn Karl ar Meur, o Mestr hag o Roue,
 Eo red dezo plega, ha raktal, pe vervel !!!...
 Setu ma gourhemenn !!! »

Ma Breiz, ne oe ket pell

E tegouezas ganit eun darvoud estlammuz,
 Ha da wad a redas, evel eur ster fonnuz,
 Dre leh ma tremene *arme* an Impalaer...
 Trehet e oes, siwaz ! En da barkou ken kaer,
 War ar mêz hag e kêr, war gerreg da aochou,
 Er hastell, en ti-plouz, koulz hag en da goajou,
 En heñchou braz, dre-oll, nemed korvou maro !...
 Bugale, tud yaouank, tud koz, merhed, gwragez,
 Paour, pinvidig, war vor, en draonienn, er menez,
 Evel ma kouez, en hañv, dindan falh ar meder,
 Ar foenn en or prajou, ar pennou-ed pounner,
 Evel-se e koueze da vugale, va Breiz,
 Ha da galon, gand euz, a lamme en da greiz !!!
 Pebez reuz damantuz !!! Burzud, va bro garet,
 Er brezel spontuz-se, pa n'ah-eus ket kollet
 Ar berad diweza a wad da waziou

An hini diweza euz da vugaligou !!!

Karl-Veur a hounezas !!! Hogen, paotred Bro-Hall⁷
N'o-doe nag amzer hir, na leh da fougeal
Diwar-benn o gounid, rag te, ma Breiz-Izel,
Pa fell d'eun enebour treuzi gand eur gontell
Da galon virvidig, te a gav nerz bepred.
Da stourm beteg ar penn ha da lakaad er bed
Bugale galoneg, a ouezo da viken
Mervel, pa vezo red, pe veva d'az tivenn !!!

E-touez an dud kreñv-se, te a hanas unan
Brudet dreist ar re all (anvet am-eus Morvan !),
Morvan ar Meur, Morvan doujet evel Roue,
Ha karet gand an oll e Leon, e Kerne...
Hennez a oa ennañ kalon eur gwir Vreizad !
On zudou-koz, gwechall, en Arvor, en Argoad,
A gane, tost d'an tan, er goañv, an taoliou kaer
Greet gantañ, er brezel, 'eneb an Impalaer,
Mab hena Karl ar Meur, Loeiz an Deboner⁸,
Evid miroud dinammm da wiriou, ma Breiz ker !...

Me a fell din ivez displega d'am broiz
Istor wirion Morvan, ha lavared em giz
E vuhez, e varo... Selaouit gand evez,
Tud yaouank, c'hwi pere⁹, marteze, eun devez,
A ranko kuitaad Breiz, evid divenn Bro-Hall,
Ha mond d'ober brezel d'heh enebourien fall !
Likit en ho spered skwer ar Roue Morvan !
Ha, pa zeuy an eur griz, mar fell da beb unan
Beza heñvel outañ, gwaz d'ar Brusianed¹⁰ !!!

War dinaou eur menez, Morvan en-doa savet,
Evel eun er¹¹ e neiz, war eur roh, e gastell,
Eur hastell, eveltañ, rust ha garo d'ar zell...
An Dourdon, ster fonnuz, a ree an dro deza'
A-barz meska e zour gand dour ar mor tosta...
Koajou dero¹², koz ha don, a bep tu, eun dremmwel,
Lanneier, bourhigou, gand o zouriou uhel,
Parkou gwiniz¹³, meinhir, brug, prajeier balan,

⁷ **Bro-Hall** : Bremañ ne reom diforh ebed etre "Bro-Hall" hag ar "Frañs". Evel-se e ra an oberour. E gwirionez n'eus deuz ar Frañs nemed gand le Strasbourg, e 843. Al le-ze a zo ar skid kenta e galleg.

⁸ **Deboner** : Notenn bet lakaet gand an oberour : "N'am-eus ket kavet, e Brezoneg, eur ger da lared Deboner. Gwechall, ar ger-ze a oa anavezet mad. An Ao Kervarker, en e Varzaz Breiz, a skriv : « Dre gompasion, ouz ar Pasion, on Roue deboner ». Notenn : Eun ano all e-noa : Karl Devod (778-840). Impalaer e oe euz 814 da 840.

⁹ **pere** : fazi boaz en amzer-ze, pa skrive Gwennou. "C'hwi, ar re".

¹⁰ **ar Brusianed** : Gweled an notenn pelloh.

¹¹ **er** : erer.

¹² **dero** : "derv" er skrid orin. Distagadur Bro-Oelo.

¹³ **Parkou gwiniz** : parkajou gwiniz.

Kerreg difrouez, setu rouantelez Morvan !...

Diwar veg an tour braz savet en e gastell,
War behini¹⁴ en-doa displeget e vanniell,
Morvan, evel eun er, a daole gwech hag all
Eur zell leun a hourdrouz war-zu mêziou Bro-Hall ;
Ha goude, pa droe e lagad war-zu Breiz,
E galon, gand al lorh, a dride en e greiz,
O weled, er parkou, dre-oll, e zujedi,
Leun a nerz, a yehed, oh arad, o vedi...
« Pa vo red, emezañ, an dud-mañ a ouezo
Rei darbar da Vro-Hall, ha divenn stard o bro !
Gand ar mergl, a gredan, va hleze 'zo debret
Hag, oh ober netra, ez on oll morgousket...
Salo ma klevin c'hoaz trompillou ar brezel
O hervel paotred Vreiz, a bep tu, d'am hastell,
Evid mond d'an emgann 'eneb paotred Vro-Hall,
Pe 'eneb ar Zaozon, tud displeal, tud fall !!!
En deiz-se, me hen lar frêz, e vo gwelet er bed
Ar pezh bete-vremañ ne oe biskoaz gwelet !...
Va Doue ha va Breiz ! Ne zoujan nemete !!
Va fried ha va gwir ! Setu va harante' . »

¹⁴ **War behini** : war an hini.

II

Karl ar Meur a varvas ha, raktal, e peb bro
Ne oe ken komz nemed diwar-benn e varo...
Pebez dizamm !!! Ar Sax, an Alamagn, Bro-Hall,
Ar Hreisteiz, ar Huz-heol hag an oll broiou all,
War bere¹⁵ Karl ar Meur en-devoa astennet
E vaz a Impalaer, pounner, ha gwall doujet,
Oll e trident gand joa, o soñjal ne oa ken
Eun den d'ober deze tevel, plega o fenn
Dirag e Varoned ha dirag e vanniell !...
Hag, evid gwir, Karl-Veur, koulz a-dost hag a-bell,
E-pad hanter-kant vloaz, oh ober reuz dre-oll,
A oa bet eur gwall veh war ziskoaz ar bed oll !!!

Morvan, eñ, Roue Breiz, ne oe tamm strafuillet
O weled eur Sezar e leh eun all lakaet !...

Koulskoude, pa zavas Loeiz an Deboner,
Mab ar Roue-Kurun¹⁶, mab ar hoz Impalaer,
War dron e Dad, pa oe gwelet en e balez,
En e zorn, evel merk euz e Rouantelez,
Eur hleze aour fetiz ; pa lakaas war e benn
Kurunenn Karl ar Meur, an Impalaer Romen¹⁷,
Pa zeuas tud al Lez¹⁸, Eskibien, Baroned,
Diskabell, heb kleze, doujuz ha daoulinet,
D'obr le da veza bepred sujidi vad
D'an Impalaer nevez kerkoulz evel d'e Dad,
E gwazied ar Bobl, dre-oll, e tremenas
Evel eur hridienn a gas hag a zroug braz,
Rag ar Bobl a oa skuiz o veza chadennet,
Ha mall a oa ganti da veza dizujet..

Maro Karl-Veur, ar Bobl a gemeras kalon..
Kredi a reas teurel eur zell war-zu an Tron,
War-zu an Impalaer, eur zell leun a hourdrouz,
Hag an Tron a grenas, an Impalaer kerkoulz,
Rag aon na zeuje ar Bobl dizorhennet
D'o diskar da viken heb tamm truez ebed !...

Ar sklav, pa fell dezañ terri e chadennou,

¹⁵ **War bere** : war ar re

¹⁶ **ar Roue-Kurun** : Notenn gand an oberour : Lesano bet roet da Garl-Veur.

¹⁷ **an Impalaer Romen** : Notenn gand an oberour : "Karl-Veur a oe sakret Impalaer ar Huz-Heol er bloaz 800 gand ar Pab Loen III."

¹⁸ **tud al Lez** : Notenn gand an oberour : "E galleg, *les gens de la cour*. Bemdez c'hoaz e leverer : Lez ar Roue, Lez an Iliz, Lez ar gwiriou, al Lez-Varn, etc... E Lantig ez eus c'hoaz eur chapel anvet Itron Varia al Lez, *Notre-Dame de la Cour*. A beh e teu an ano-ze ?"

Ha gounid evid mad e wir, e frankiziu,
A rank beza dalhmad dispont ha kaloneg,
Lemm a spered, eskuit, war evez, ha penne
En e zoñj, bepred prest, en abeg kas da benn
E hoant, da gemered pe gleze, pe bluenn,
Anez, biken gantañ ne zeu da vad an dro !...

Loeiz an Deboner, pa zihunas ar vro,
En-doe spont, eur pennad, da goll e gurunenn...
Mez ne badas ket pell gand ar Bobl he froudenn !...
Darn a gollas kalon : an droulañs, a-hend-all,
Neuze, evel bepred, a oe ar brasa gwall.
En eun tu Tudjantil, Eskibien, Baroned,
En tu all kouërien, skuiz o veza renet.

Mez heb den d'o divenn, da houlen o gwiriou,
D'o sturia, er brezel, da rei deze armou !..
Setu perag ar Bobl a oe ken prim trehet !!!
Setu perag Loeiz, eur pennadig spontet,
A gemeras kalon : ... ha pa daole eur zell
War e Rouantelez, koulz a-dost hag a-bell,
Ne wele nemed tud, er-mêz hag er hêriou,
Bepred prest da zenti, da baea an taillou
Oll *nasket* a-nevez !...

Ne oa nemed Morvan !...
Euz an Impalaer braz hemañ ne ree neb van
Nag euz e lezennou... En e hiz e veve,
Ha ne zoñje netra, na den, nemed Doue !!!

.....

Ha red e vezo mond da weled Breiz-Izel
Da glask ar Roue-ze, d'ober dezañ brezel ?...
Dond a reas da zoñj, neuze, d'an Deboner
Penaos e dad brudet, Karl-Veur, an Impalaer
Goude beza trehet Vitikiad¹⁹ ha Didier²⁰,
En-doa skuillet gwad Breiz e kêr, el lenneier,
Er vourh hag er hoajou, heb spont hag heb truez...
Setu kavet gantañ ar gwella digarez !!!
« Red eo din, emezañ, kastiza Roue Breiz !!!
Mez, pa zoñj an Iliz, pa'z eo eun den a feiz,
Me a gaso dezañ Witchar²¹ evid kannad...
Hennez a zo eun den hag a gaso da vad
E gefridi diêz... Rag n'ez eus ket unan

¹⁹ **Vitikiad** : ?

²⁰ **Didier** : ?

²¹ **Witchar** : "Witcar" hervez al leoriou istor. Eur manah.

A vefe, eveltañ, gouest da douella Morvan !...
Evel e vestr Alkuin²², ez eo den a spered,
Meur a dro-bleg ennañ, ha teodet kaer-meurbed.
Treh dezañ e-unan, e pep hent war evez...
Ouspenn am-eus klevet, en e zorn, aliez,
Ar hleze a reas burzud... Kasom Witchar !
Ne welan ket, em Lez, eur hannad dezañ par !!! »

.....

Setu Witchar en hent da vond da Vreiz-Izel...
Morvan a reas dezañ, war dreuz dor e gastell,
Eun degemer klouar ha leun a hourdrouzou !...
Roue Breiz ne oa ket mestr e troidellou,
Rag-eeun ez ee dalhmad !... Pa zeujont er zal vraz,
E zell du ha garo, Morvan a azezas,
E zaouarn serret kloz ha droug braz en e greiz,
Pa lavaras Witchar : « M'ho salud, Roue Breiz,
M'ho salud, gand doujañs, a-berz an Impalaer,
Ma Mestr, an Hegarad, Loeiz an Deboner !!!
Me ho salud, Morvan, Roue fur ha brudet !
Gloar deoh digand Doue, buhez hir ha yehed,
Peoh ha gounid, dalhmad, war hoh enebourien,
Evurusted, brud-vad, e-touez ar Gristenien !!! »

Witchar, *kannad louarn*, o komz en doare-ze,
A chomas en e zav dirag tron ar Roue,
Hag hemañ, tamm-ha-tamm, e koueze e gounnar,
O klevet komzou flour ha dudiuiz Witchar !...
Ar manah ne gomze na diwar-benn gwiriou
Dleet d'ar gwaz paea, beb bloavez d'e aotrou,
Na diwar-benn al le a ree Priñsed Vro-Hall
Da veza, e peb hent, doujuz ha tud leal,
Da stourm, da skuill o gwad evid an Impalaer...
Witchar, *kannad luban* ha fur evel eun naer,
A falveze dezañ, gand e droidellou,
Gounid kalon Morvan, starda ar chadennou
A stage Breiz-Izel ouz Impalaer Bro-Hall !...
Kuzulierien re flour a zo mignoned fall !!!

Morvan a oa nehet hag ennañ e-unan
A lare : « Bennoz deoh, ma Doue !!! Me, Morvan,
Setu-me, tamm Roue, mignon eun Impalaer,
Breur Loeiz an Habask !... Trugarez, ma Zalver,
Pa hellan diwall c'hoaz va bro ger Breiz-Izel
Diouz eun droug gouelvanuz... Va malloz d'ar brezel !!!
Aotrou, plijet ganeoh rei ar peoh da Vro-Hall

²² **Alkuin** : Alcuin (735-804) teologour angl-saoz (?)

Ha d'am Breiz... Teurvezit a beb droug o diwall !... »
Trehet e oa Morvan, ha torret e gounnar...
Eet eo ganit an dro da vad, toueller Witchar !!!

Ar manah, lorh ennañ gand eur gounid ker braz,
A lavare bennoz da Zoue, pa welas
Ar Rouanez o tond etrezeg he fried...

Na pegen kaer e oa gand he bleo alaouret
Ledet war he diskoaz, gand he daoulagad glaz
Evel bolz an Neñvou, gand eur gurunenn vraz
En perlez hag en aour kempennet war he fenn
Gand he gouriz arhant, hag he gwiskamant wenn...

Impalaer galloudeg, Loeiz, mestr e Bro-Hall,
Roue doujet e-touez an oll Rouanez all,
Te a grede beza sturier, rener ar bed
Ha ne gavjes biken, war da hent, den ebed
Evid mond a-eneb da lezenn, da gomzou...
Sell bremañ, Impalaer !!! Gand c'hoarz he muzellou,
Eur plahig, bugel c'hoaz, mez eeun en he spered,
Rouanez Vreiz-Izel, ha gand Morvan karet,
Eur plah, Loeiz Bro-Hall, gand eur pok, gand eur zell,
A dreho war Witchar, a ray da Vreiz-Izel
Kemer kounnar ouzit, stourm beteg ar maro,
Ha da Vorvan beza gloar hag enor e vro !!!
Evel-se, aliez, an armou disterra
A dreh, pa blij d'an Neñv, an armou ar hreñva !!!

Skañv hag o vousec'hoarzin, setu ar Rouanez
O tond e-tal an Tron, o tostaad war he fouez
Ouz he fried Morvan, o vond mistr ha mibin
Da rei dezañ eur pok tener, war e zaoulin
D'azeza heb tamm mez, heb ober van ebed
A Witchar, gwir gannad eun Impalaer brudet...
Gand he divreh e reas da houzoug ar Roue
Eur houzougenn dispar, hag hemañ, kaer en-doe,
Gand ma kare e wreg, ne hellas ket terri
Al liamm tener-ze... Touellet e oa ganti !!!

Hir amzer e komzas goustadig en e skouarn,
Hag, endra ma komze, Morvan, an den houarn
A zave kounnar ruz ennañ... Allaz, Witchar,
Eet eo da dro da fall, kouezet eo d'an douar
Ar pez az-poa savet war-bouez kemend a boan,
Treh eo ar Rouanez... Lak evez ouz Morvan !!!

Pa davas e bried, hemañ gand karante'
A bokas stard dezi, hag, o sevel neuze
En e zav, rust e zremm ha garo e lagad,

E laras da Witchar : « Distro d’ar gêr, kannad !
Lavar d’an Impalaer ah-eus kollet da boan,
Ha n’ah-eus ket gallet drougaveli²³ Morvan !...
Lavar dezañ e fell din beza mistr em bro
Eveltañ, e Bro-Hall, deuet neb a garo !!!
Ne fell ket din beza dindan e vaz pleget !...
Breiz da Vreiziz, Witchar, Bro-Hall d’ar Hallaoued !
Setu ma ger, manah !! Kenavo an distro !!!
Breiz-Izel da Vorvan, pe da Vorvan ar maro !!! »

²³ drougaveli : notenn gand an oberour : “drougaveli, strobina. Ger a dalv ar pezh a lavar ar gerioù galleg *ensorcelé, jeter un mauvais sort, le mauvais œil.*”

Eilved gwerz

III

Pa lavaras Witchar dezañ komzou Morvan,
An Impalaer Loeiz, ker braz e oe e boan,
Ken grevuz e estlamm, ma chomas dilavar
Pell amzer... Goude-ze, e laras da Witchar :
« Re bell, dre Zant Denez²⁴, am-eus-me gouzañvet
A-berz Morvan-ar-Foll, a-berz e Vretoned
Dismegañs !... Ma ! M'hen tou a wir galon hirie,
Emberr o-devo keuz diwar-benn kement-se !!!
Mar don mestr e Bro-Hall ha mab da Garl-ar-Meur,
An dud diaviz-se, a-barz na vo nemeur,
A skuillo daerou druz, hag o gwad a redo
Ker stank evel gwechall, adarre, en o bro,
Ha Morvan, o Roue, hag e wreg dievez,
Pa reont ahanon hag euz ma madelez
Ken nebeud all a stad, gwaz, gwaz teir gwech deze !
Ne gavint neb truez, m'hen tou dre va hleze ! »

Greet gantañ al le-ze, Loeiz an Deboner
A laras d'e vignon : « Arabad koll amzer,
Witchar !... Dastum raktal e-touez an Deutoned²⁵ !
Tregont mil den d'ober brezel d'ar Vretoned !..
Mar ne vez a-walh, dastum daou gemend-all,
Ma chomo ar gounid, evid mad, gand Bro-Hall ! »

War evez, deiz-ha-noz, Morvan ne lezas ket
Tud Bro-Hall da dostaad... War veg an tour pignet,
En e gastell ar Roh, displeget e vanniel,
E kornas da dud Vreiz deredeg d'ar brezel...

En Arvor, en Argoad, garm skrijuz ar Roue
A spontas an Hekleo... Dre-oll, hemañ, neuze,
A grias a-bouez-penn : « War-zao evid or bro !
Morvan a zo ganeom. Morvan on diwallo
'Eneb an Deboner hag an oll drubarded
A fell deze or has, a-nevez, da sklaved !!!
War-zao ! Deskom eur wech da zoudarded Loeiz

²⁴ **Zant Denez** : Sant Denez, e-kichenn Pariz, leh ma vo douaret rouanez Bro-Hall da houde.

²⁵ **an Deutoned** : Notenn gand an oberour :Teutoned ; E galleg, Teutons, en Alamagn, Deutschen. An darn-vuia aneze a zo, hirie, sujidi d'ar Prus ! Hag ar Brusianed a zo bet a-viskoaz hag a zo, dreist-oll abaoe brezel spontuz 1870-71, on enebourien ar gwasa. Notenn : goude brezel 1870 e oa ar Frañsizien krenn a-eneb an Alamaned, anvet Prusianed ganto. Er skoliou e veze kanet "Vous n'aurez pas l'Alsace et la Lorraine" ...

Ez eus c'hoaz eur gwad beo e gwazied Tud Vreiz !
War-zao, evid or bro, war-lerh Morvan-ar-Meur
War-zao ! en an' Doue, ha dorn-ha-dorn, breudeur !!! »

War-zao ! Setu ar garm a youhas kant mil den
E kêr ha war ar mêz, er menez, en draonienn.
Denjentil ha kouër, micherour, merdead,
Bihan, braz, pinvidig ha paour, oll a-vagad
E teredjont d' "Ar Roh" !... Ar gwazed²⁶ tro-war-dro
A zeuas oll ivez da zivenn o mamm-vro...

Morvan-Veur, Roue Breiz, e porz braz e gastell,
O dastumas gand lorh dindan skeud e vanniel..

Neuze e oe gwelet paotr Treger, paotr Kerne,
Poatr Gwened, paotr Leon, tost an eil d'egile,
Dorn-ha-dorn, o toui stourm beteg ar maro
Evid divenn o zud, o Doue hag o bro...

Ha, pa lavarjont oll en eur vouez : « *Torr e benn* »,
An douar a grenas evel gand an derzienn !...

Ar Roue, pa welas er stumm-ze Breiz-Izel
Dastumet a bep tu dindan skeud e vanniel,
Pa glevas an oll dud o houlenn ar maro
Kent eged fazia ha dilezel o bro,
Ar Roue, lorh ennañ, a vouez skiltr hag uhel,
A laras : « Degasit amañ ma marh brezel !...
A-raog, a-raog ! Bevet dalhmad an Erminig²⁷.
Sent Breiz ganeom ha gwaz da Vro-Hall gizidig !!! »

Hag an oll war e lerh : « Bevet Breiz da viken !
Bevet Morvan-ar-Meur ! Gwaz d'on enebourien ! »

Neuze, seh e lagad ha luhed en e zell,
Roue Breiz a roas d'e zaou vabig gevel
Eur pok stard ha tener... E wreg, ar Rouanez,
Daoust ma oa he halon gloazet gand an enkrez,
A dostaas, doujuz, hag en eur vousec'hoarzin
Ouz he fried Morvan !... He fenn war e zaoulin,
E lavaras dezañ : « Ma Roue, ma mignon,
Me a bedo kement ar Werhez, on Itron,
Evidout, evid Breiz, e-pad an emgannou,
Ken ma chomo an treh da vad gand hoh armou !
Nerz ha kalon, Morvan, m'az kwelin prest er gêr
Em hichenn, e-kichenn on daou vugelig ker...
A-raog evid or Bro ! Doue hen gourhemenn !

²⁶ **Ar gwazed** : Notenn gand an oberour. Gwaz : Pa vez ano diwar ouspenn unan, gwazed pe gwizien. E galleg : vassal, vassaux.

²⁷ **an Erminig** : Notenn gand an oberour : Loen bihan pintet war skoed ha banniel Breiz, gand ar ger-mañ : Malo mori quam fœdari. Da lavared eo e brezoneg : Gwell eo ganen mervel eged beza mastaret !...

Bevet an Erminig, hag or Breiz da viken !... »

Peurarnezet, Morvan war e varh a bignas...

Neuze ar Rouanez, a-nevez, a zeuas

Eun hanaf en he dorn, leun a win koz ha kreñv,

Hag he sell glaz ha dous savet war-zu an Neñv... :

« Ev, emezi, Morvan, ha Doue r'az nerzo...

An treh d'or Bretoned ha d'o henta distro !... »

Morvan a gemeras an hanaf alaouret,

Ha, laret dre eur zell, trugarez d'e bried,

Eh evas a-stok-penn ar gwinn a oa ennañ,

O lared : « Breiz a-raog, en an' Doue, bremañ ! »

Setu Breiziz en hent war-lerh Morvan-ar-Meur,

Heb soñjal tamm, siwaz ! er maro, eun drougeur !...

An heol a zav skeduz hag e genta bannou

A skuill tommder ha nerz war gêr, war ar mêziou...

An evned a zihun, hag o han dudiu

A lavar meuleudi d'o Mestr Oll-Hallouduz...

Eun êzennig klouar a hwez war ar hoajou

Hag a hej goustadig ar yeot glaz, ar bleuniou...

En touriou, ar hleier a diñs an "Angelus"

Hag o mouez en em vesk gand moueziou arvaruz

Al loened er parkou... Pell, du-hont, ar mor braz

A vorgousk, o lipad an trêz, ar bezin glaz...

Ar brug hag ar balan, hag ar bokedou-lêz,

Al lann hag ar gwezvoud, ar roz, ar rouanez,

Ar spern-gwenn, al lore, ar skav²⁸, ar munudig²⁹

A skuill o hweziou mad !.. War an derv, ar C'hoantig³⁰

A ra lammou dispar... Ar zaout hag ar hezeg,

An deñved, dishual, er park hag el lanneg,

A beur hag a hoari, dispont !... War an douar,

Biskoaz devez kaerroh ne lugernas, m'hen lar !...

Ha soudarded Morvan, o weled traou ken kaer,

A rede d'an emgann, laouen ha dibreder...

Ped aneze, siwaz ! a zistroio da Vreiz !!!

An heol a zo skeduz, ar gwad tomm en o hreiz,

O divreh leun a nerz... E Morvan, o Roue,

O-deus eur fiziañs vraz... Penaoz sponta neuze ?

Ar Rouanez, pignet war veg tour he hastell,

Gand he daou grouadur, a heulie, en dremmwel,

Morvan hag e baotred o vond en an' Doue,

²⁸ skav : skao ("skav" e Bro-Oelo).

²⁹ ar munudig : an turkantin.

³⁰ ar C'hoantig : Notenn gand an oberour : Koantig, *écureuil* (gwiñver). Na koanta ger da hervel eul loen koant e-touez ar re goanta ! Pinvidikoh, aliez, eo on yez Breiz eged hini Bro-Hall.

Da stourm evid o Breiz, o gwir hag o Roue...
Emberr n' o gwelas ken... Setu-hi heh-unan,
Rouanezig yaouank, gand daou vugel bihan !!!
Den ne chom da nerza he halon hlaharet...
Oll int eet d'an emgann evel gwir Vretoned !!!
Den a-hont, en dremmwel, ha den en he hichenn,
Nemed he daou vabig, kousket war he barlenn...

Eur peoh spontuz dre-oll... Ne glev, siwaz, netra
Nemed, gwech an amzer, ar hleier o tiñsa
An eur, evel ar glaz, gand eur vouez truezuz...
Neuze he daoulagad a skuill daerou fonnuz,
O lared : « Sent ma Bro, trugarez, me ho ped !
Mirit d'am bugale o zad, din ma fried !!! »

IV

O kas da Vreiz-Izel e Deutoned digar,
Loeiz a lavare d'e guzulier Witchar :
« Na truez, nag arzao !!! Lazit braz ha bihan,
Ha, dreist-oll, degasit amañ ar foll Morvan,
Maro, pe e buhez... Mall am-eus d'hen gweled
Dirag ma zron, amañ, treid, daouarn chadennet !...
An hini hen treho, mar fell dezañ arhant,
M'hen gray, dre Zant Denez, pinvig hervez e hoant !
Nag arzao, na truez !... Drant e vo ma halon
Pa glevin seni glaz an diweza Breton !!! »

Breiz-Izel, Impalaer, ne deo ket c'hoaz trehet,
Ha, kaer gourdrouz ah-eus, e-touez da Deutoned,
Evite da veza tregont mil bleiz digar,
Hini ne zistroio biken d'e vro, m'hel lar...
Dant evid dant, Loeiz !!! Ne chomo ket unan
War-lerh kounnar tud Vreiz hag o Roue Morvan !!!

Trehet ha lazet oll e Deutoned, Loeiz
A halvas tud ar Sax³¹ prim-ha-prim da Bariz
D'o has da Vreiz... Tud kreñv ha, gwechall, tud vrudet.

Hirie sklaved... Karl-Veur, an Impalaer brudet,
En amzer Witikind³², tregont vloaz pe ouspenn,

³¹ **tud ar Sax** : Notenn gand an oberour : *Tud ar Sax*, e galleg *Saxons*. En Alamagn, *Sachsen*. Hirie, dindan lezenn Impalaer an Alamagn, daoust m'eo lezet, evid ober goap anezañ, e ano a Roue gand o Mestr.

A stourmas d'o flega dindan e hourhemenn !!!
Ar Sax d'an Deboner kant mil den a roas,
Ha, gante, ar gwall-reuz a oa hirroh, siwaz...
Koulskoude, e deg sun e oe fin d'ar brezel
Ha trehet tud ar Sax gand paotred Vreiz-Izel !!!...

Pegoulz e paouezo, ma bro ger, da boaniou ?
Pegoulz e vezo c'hoaz pare da houliou ?...
Allaz ! ne deo ket c'hoaz degouezet an amzer,
Rag ne deo torret c'hoaz tamm kounnar an Deboner !!!

Nann, siwaz ! N'eo ket c'hoaz peurdorret o hounnar
Gand Impalaer Bro-Hall hag e vignon Witchar....
Hag, evid diskouel³³ sklêr n'ah-eus truez ebed
Da hortoz euz o ferz, setu-ni, pennfollet,
Pa weljont eet da goll ar sklav hag an Teuton,
Da gemenn d'o zikour eur rumm tud digalon,
Heñvel ouz loened gouez, kriz evel en tigrad,
Bugale an Huned, an Avared³⁴ anvet...

Ar re-mañ, er brezel, ne felle ket deze
Ober prizonierien... Kement den a goueze
En o galloud, raktal, e veze dibennet,
Hag ar penn-ze, gwad-oll, a-ispill kordennet
E kerhenn eur marh gouez, evid diskouel d'ar bed
E oa an Avared tud heb kalon ebed,
Krisoh evid tud gouez, bleiz, ha tigr ha leon,
Hag an oll loened mud a vev er hoajou don !!!...

O hervel d'hen sikour d'ober brezel da Vreiz
An Avared digar, an Impalaer Loeiz
A ziskouel en-deus soñj euz al le greet gwechall
Gantañ, pa oe lakaet da Vestr-Meur e Bro-Hall...

« Ne vin biken dineh, a lare da Witchar,
Tamm peoh, tamm joa n'am-bo biken war an douar,
Nemed goude maro an diweza Breton...
M'hen tou dre Zant Denez, ha ma le 'zo gwirion !!! »

Spontusoh le kristen birviken ne reas !!!...
N'eus forz, ma Breiz ! Doue n'hen selaouo ket c'hoaz...
Da wad a redo stank ha fonnuz adarre,
Da wad ker birvidig... An Avared ive'
A welo pegen kreñv, pegen dispont eo c'hoaz
Da vibien, fiziuz oll en o Roue, er Groaz...

Da Zoue ha Morvan !... Bevet an Erminig !!!
Gwaz d'an enebourien !!! Argad !! D'ar stourm, Breizig³⁵ !!!

³² **Witiking** : ?

³³ **diskouel** : diskouez (furm Bro-Dreger).

³⁴ **Avared** : N'eo ket gwir. Ne oa ket Huned deuz an Avared.

³⁵ **Breizig** : Breiz Vihan.

Ha Breiziz, kustumet da falhad ar prajou,
Beb a falh en o dorn, er run, en traoniennou,
A falhas, ken herruz, en emgannou digar,
E-leh yeot, pennou tud, penn Teuton, penn Avar,
Penn Saxon, ken gwad beo an enebourien-ze
A deilas o douar evid an Eost neve' !!!..

Neuze an Impalaer, pistiget gand ar boan
Da veza bet trehet teir gwech gand Breiz-Vihan,
A halvas d'hen sikour ha d'hen veñji tud Frañs³⁶ !!!

Va bro, gwechall, Loeiz, nemed gand dismegañs
Ne gomze ahanout... Na pebez kemm hirie !!!
Da baotred kaloneg ha Morvan, o Roue,
A lak d'an Deboner ha d'e vignon Witchar
En o halon kemend a spont hag a gounnar,
Ken o-deus, er wech-mañ, lakaet stard en o fenn
Da blega, evid mad, dindan o gourhemenn !!!

E penn e zoudarded, an Impalaer Loeiz
A falvezas dezañ ober brezel da Vreiz...
Morvan, bete neuze, dirag an Deutoned,
Dirag arme ar Sax, dirag an Avared,
Dispont ha fiziuz oll, pa oe laret dezañ
E oa 'eneb tud Frañs e vije red bremañ
Peurober ar brezel, mervel pe veza treh,
Morvan, en e galon a zavas eun tamm neh,
Rag tud Bro-Hall a oa brezelourien doujet,
Hag o brud, en o raog, a rede dre ar bed.

An Deutoned, tud Sax, an Avared ive',
Den, e Breiz, ne ouie piou e oa an dud-se,
Den, e Breiz, ne ouie penaoz e oa anvet
O mistri... Mez, hirie, eun Impalaer brudet,
Eun arme, kustumet da hounid abaoe pell,
Setu ar re a zeu da Vreiz d'ober brezel !!!

« Eun Impalaer !!! Hennez, a laras Roue Breiz,
A zo, da vihanna, gwad kristen en e greiz...
Hennez am-eus, pell 'zo, klevet brud anezañ...
Mall am-eus d'hen gweled ha da houren outañ !
Korv ouz korv, en on dorn peb a gleze pounner !!!

Impalaer ouz Roue ! Morvan ouz Deboner !
Breiz-Izel ouz Bro-Hall !!! Ha, mar plij gand Doue
Lezel an Impalaer da drehi ar Roue,

³⁶ **Frañs** : Ne oa ket deuz ar Frañs en amzer Loeiz Deboner !

Gwaz evidout, Morvan, gwaz evid Breiz-Izel,
Gwaz evid da bried, evid da zaou vugel !!!
Mar bez red din mervel, kaloneg e varvin
Ha ker d'an Impalaer ma buhez a werzin...
Koulskoude, ma ouijen eh hellje ma maro
Gounid peoh hir, enor hag eürusted d'am bro,
Ma ouijen e kavje ma daou vab, ma fried,
Skoazell ha divenn mad, pa vin-me diskaret,
Ma ouijen e vije Loeiz an Deboner
Eun tammig truezuz ha mad en o heñver,
Gand nebeutoh a geuz e larjen kenavo
Da gemend a garan, d'am herent, d'am mamm-vro !!!
Mez ne ouzon netra !... Loeiz a zo digar
Ha muioh digar c'hoaz eo e vignon Witchar...
Oll dud Vreiz, marteze, ne dint ket tud leal,
Hag, en o zouez, a zo mignoned da Vro-Hall !!!
Ma ! brezel da Loeiz, brezel beteg ar penn !!!
Ar Werhez d'or zikour ha Sent Vreiz d'on divenn ! »

Ne oa ket peurlaret gantañ ar homzou-ze,
Pa welas, en dremmwel, er hoad hag er mene',
Tud Bro-Hall o tostaad, stank evel ar stered,
Ha Loeiz en o fenn, gand e benn kurunet,
E gleze en e zorn, war eur marh gwenn pignet,
Hag, e pep tu dezañ, e genta Baroned...
Er wech-mañ e vo red dit, ma bro Breiz-Izel,
Ha d'ar Roue Morvan, pe drehi, pe vervel !!!

Deiz spontuz !!! An douar dindan dreid ar hezeg
A gren... El lanneier, el liorz, er vezeg³⁷,
Ar gurun a hourdrouz, ar glao a gouez fonnuz...
Eun avel dirollet, gand eun nerz didrehuz,
A ziskar derv, kistin, onn ha gwern, er hoajou !...
Ar chatal, pennfollet, a laosk youahadennou,
Ha garmou truezuz, o klask dre-oll goudor !!!
Ar bed oll o kemenn tremenvan an Arvor !!!

³⁷ **er vezeg** : ne vez ket kavet ar ger-ze e geriadur ebed. ; "brouskoad" hervez an oberour.

V

Pa hoarveze an traou a zisplegom amañ,
Breiz ne oa ket heñvel ouz ar pezh eo bremañ...

E koulz Morvan, el leh e welom oll hirie
Bourhig koant Priziag, tost da ribl an Elle,
Ne oa nemed koajou, hir ha ledan meurbed,
Pleustret gand loened gouez, ha koz evel ar bed...

Er hoajou-ze, gwechall, a lar c'hoaz an dud koz,
E teue an "Druzed"³⁸, war-dro an hanternoz,
Da zastum "Uhel-varr", d'ober sakrifisou
Evid gounid bennoz ha skoaz³⁹ o Doueou...

Er hoajou-ze, 'liez, gwad mabden a redas
Fonnuz evel eur ster, da ruzia ar yeot glaz...
Er hoajou-ze, Marzin, an enkantour⁴⁰ brudet,
A ganas e werziou d'an hekleo sebezet...
E vouez a oa ker skiltr, e gan ken dudiuz,
Ken ar bleiz, an hoh-gouez a zerede doujuz
D'hen sealou, ken ar ster a chome hep trouzal
An evned hep kana, an deñved hep blejal...

Peleh ema bremañ da delenn aour, Marzin ?...
Pa ne glever mui ken, e Breiz, he mouez lirzin ?...

O kuitaad ar hoad don, Morvan hag e arme
A gavas en eun taol tud Vro-Hall diraze,
En-dro d'o Baroned reñket mad ha diskuiz,
A-uz d'o fenn banniel an Impalaer Loeiz...

Neuze e oe klevet yaouhadennou spontuz
Na lavaras biskoaz an hekleo randonuz
Re all heñvel oute... « Morvan ha Breiz-Izel ! »
« Bro-Hall ha Sant Denez !... » - « Pe drehi, pe vervel ! »
« Gwaz d'on enebourien ! » - « Bleizi Breiz d'ar maro ! »
« Bevet an Erminig ! » - « A-raog evid or bro ! »

Dreist an oll garmou-ze, e kleved gwech hag all
Mouez korn-bual tud Breiz, son trompillou Bro-Hall
En em veska gand trouz euzuz ar hlezeier,
Gand strakl ar hurunou ha klemmvan ar hleier :
Ar hezeg, ouz ar brid amzent, a houririne,
Ha douar kaled Breiz gand ar spont a grene !...

³⁸ **Druzed** : an Drouized.

³⁹ **skoz** : skoazell

⁴⁰ **enkantour** : achanter.

Morvan, eñ, ne wele nemed an Impalaer :
« A-raog ! Morvan ha Breiz !! Setu-me, Deboner !
A-raog ! en an' Doue. A-raog, Morvan ha Breiz !
A-raog ! Gwaz da Vro-Hall ! Gwaz dit, trubard Loeiz ! »

Ha Morvan d'an daoulamm... E varh, gwenn eveltañ,
A oa, me 'gred, kounnar an ivern-ruz ennañ...
« A-raog ! A-raog !... » A-dreuz ar park hag al lanneg,
A-dreuz an dour, ar hoad, ar fank, an hent meineg,
Morvan, war varh, a nij evel eul luhedenn
War-zu arme Vro-Hall, e zell rust, sonn e benn...
« A-raog, va zud, a-raog !... Pe drehi, pe vervel !...
Gwaz ha mez d'an trubard ! Bevet or Breiz-Izel !...
N'eus forz pe tud Vro-Hall a zo kalz pe nebeud !
Enebourien Vreiz int, rag-se truez ebed !... »

Hag e dud war e lerh, ken prim hag an avel,
O krial en eur vouez : « Pe drehi, pe vervel !!! »

Allaz ! n'eo ket a-walh beza tud a galon,
Tud a gar o Mamm-Vro, tud leal ha gwirion,
Evid gounid an treh, kleved a rez, Morvan ?

Penaoz gounid, lar din, pa gavo peb unan
Euz da dud deg soudard a Vro-Hall dirazañ ?...
Penaoz gounid, Roue ?... Setu-te mud bremañ !...

Emberr e lavares : « An treh pe ar maro ! »

Allaz, teir gwech allaz ! Me a glev tro-war-dro
Garm-brezel tud Bro-Hall hag hini paotred Vreiz.

Ha kalon peb unan a lamm stard en e greiz...
« An treh pe ar maro ! », Roue, setu da her !...
Dalh soñj mad anezañ, rag tud an Deboner
O-deus touet, deh c'hoaz, ho kas oll d'ar maro,
Da zoudarded ha te, ha peurziskar or Bro...
Mired a raint d'o le ! !.. Morvan, red eo mervel,
Evid miroud enor ha brud-vad Breiz-Izel ! ! !...

Biskoaz ne oe klevet garmou estlammusoh !
Biskoaz ne oe gwelet eun emgann euzusoh...
Tud Vro-Hall a wel sklêr ema an treh gante...
Tud Vreiz a oar eo red gwerza ker o buhe'...

Tud Bro-Hall, en emgann, a zo deg ouz unan...
A baotred Breiz-Izel, Impalaer, peb unan
A dalvo deg soudard ! ! ! Mar trehez an Arvor,

Ar vro baour-ze, Loeiz, a viro heh enor !!!
Tal gwenn an Erminig a vo didach⁴¹ bepred,
Ha n'eo ket hirie c'hoaz hen gweli mastaret...
Skuiz o skei gand kleze, pep soudard a Vro-Hall
Hebdale, tra spontuz, a gemer e vouhal...
Pep taol a fraill eur penn, a droh eur vreh, eur harr !!!
N'eo ken eur stourm leal, eul lazerez dispar
Eo a roas an treh da Vro-Hall, en deiz-se...
Eur vez eo, Deboner, beza treh er stumm-ze !!!
Hen gouzoud mad a rez, p'az kwelan o tehel,
Evid na weli ket tremenvan Breiz-Izel !!!

Koulskoude tud Vorvan, eur gounnar ruz enne,
A stard en o daou zorn o fraillou gwern⁴² neve'.
E beg o hwist⁴³ tachou braz ha pounner-meurbed,
Hag, evel pa vijent el leur o torna ed,
E skoont a-nerz breh war bennou tud Vro-Hall,
O krial : « Breiz a-raog !!! ». Peb den, evel eun dall,
A sko a-gleiz, a-zehou, ha soudarded Loeiz
A gouez stank d'an douar, evel pennou gwiniz
E-pad an Eost, er park, dindan falh ar meder...

Na ker e kousto dit da hounid, Deboner !!!...
« Ra vevo Breiz-Izel !!! » Gwechall, ar Romaned,
Pa glevant ar garm-ze, a dehe kuit, spontet,
A-dreuz lanneier Breiz, ken prim hag ar gedon...
Da zoudarded ivez, Impalaer digalon,
A oar bremañ pezh tud eo paotred an Arvor,
Pa stourmont da zivenn o buhez, o enor...

Setu-i, a-gantchou, skignet war an douar...
Ha stad a zo ennout, en da vignon Witchar ?...
M'hel lar a-nevez c'hoaz, an treh a gousto ker
Da Vro-Hall, koulz ha dit, hag e-pad pell amzer.
Pa zeuy en da spered ar zoñj ezu an deiz-ma',
E klevi, gand ar spont, da galon o krena !!!
« Neb a had an avel a zastum an arne... »
« Dant evid dant », Loeiz... Dalh soñj a gement-se !...

Koulskoude, an emgann a bad beteg an noz...
Ne glever a bep tu nemed klemm ha malloz...
Breiziz ha tud Vro-Hall, korv ouz korv o houren,
An eil war egile a gouez war an dachenn...
Dre-oll, tud goullet... Dre-oll tud o vervel
Berniet war dud varo !... E pep tu, en dremmwel,
An diou arme mesket, hag ar gwad o redeg,

⁴¹ **didach** : dizaotr.

⁴² **gwern** : ar wezenn (he hoard)..

⁴³ **o hwist** : **eur c'hwist** : eur fraill evid dorna an ed. Amañ, eur walenn.

Oh ober poulladou, e pere⁴⁴ ar hezeg
A lamm, pennfollet krenn... Dre-oll hirvoud, glahar !!!

Doue, pebez gwalenn !!! Sell, Loeiz, sell, Witchar,
Na pegen kaer labour !... Ra vezo milliget
Kement den a zegas ar brezel war ar bed !!!

An emgann a badas keit ar sklêrijenn...
N'en em wele mui ken tud an diou gostezenn,
Hag, hebdale, e oe red-mad d'an oll paouez...
Hag a-hend-all, derhel e vije diêz,
Ken fêzet ha ken skuiz e oa ar zoudarded,
Ha kement, a bep tu, siwaz, a oa kouezet,
Ken ar re o-devoa savet o buhe'
A oa trugarezuz an eil ouz egile !!!

Dorn Morvan a skoas, er hann, an taol kenta
Hag a zalhas da skei beteg an diweza...
Gand piou ez ay an treh, gand Bro-Hall, pe gand Breiz,
Gand Morvan-Meur, pe gand an Impalaer Loeiz ?...

An heol a yee da guz ha, goloet a wad,
Morvan, war e varh gwenn, a chomas eur pennad
Da zizeha ar c'hwez a ruille war e dal,
Pa welas, en eun taol, en arme tud Bro-Hall
Eun denjentil brudet dre e nerz hag e vent,
Hag e ano Cossus... Raktal, gand eur skrign dent,
Ha d'an daoulamm, o vond a-ziarbenn dezañ,
Savet e speg a-uz d'e benn : « Gall, emezañ,
Pell 'zo am-oa-me c'hoant da ginnig dit eur prof...
Dal ha dalh evid mad va speg e-kreiz da gov !... »

Raktal e from ar speg, o nijal dre an êr.
Ha prest e kouez war skoed soudard an Deboner...
Cossus ne fiñvas ket, daoust ma oa rust an taol,
Skiltr evel war an tomm⁴⁵ trouz pounner ar morzol...

Distag hag heb dale pennad ebed, Cossus,
En arbenn da Vorvan a red d'an daoulamm ruz :
« Bet em-eus, emezañ, da brof, Breizad morgant..
D'az tro, dal va hini, ha lar ha n'eo ket koant !... »

Gand eun taol goaf ker rust ha ken taer e skoas
Morvan, ken Roue Breiz diwar varh a gouezas....
Cossus n'hel lezas ket da zevel a-neve'...
Ker prim hag an avel e tennas e gleze
Hag o weled Morvan kouezet war an dachenn,

⁴⁴ e pere : er re.

⁴⁵ an tomm : an houarn tomm-ruz, war an anneo.

Gand eun taol a nerz breh hen dibennas a-grenn !!!

Lorh ha fouge ennañ, goude eun taol ken kaer
E stagas da grial : « Bevet an Deboner !...
Setu maro Morvan !... Gwaz ha mez da Vreiziz !... »
« Na gwaz na mez drezout, dijentil diaviz »,
A lavaras dezañ eur mignon da Vorvan...
« Da zen, m'hen tou, ne ri diwar-vremañ, neb poan !... »
Ha gand eun taol bouhal a nerz breh war e benn
Hen stlejas maro-mik war Vorvan, el leurenn !!!...

Trehet Breiz !!! El leur-gann ne gleved, gwech hag all,
Nemed eun den o klemm, eur marh o c'houirinal,
Ha, pa zavas al loar, ne weled tro-war-dro
Nemed brini e-leiz war ar horvou maro,
Nemed dour an Elle o kas war-zu ar mor
Gwad tud Vro-Hall mesket gand gwad tud an Arvor !!!

Breiz-Izel, skuill daerou !... Hirvoud, rouanezig !
Setu maro Morvan !... Lavar d'az taou vabig
Ez eo kouezet, a-hont, da bried hag o zad
Evel eur gwir Roue, evel eur gwir Vreizad,
Heb biskoaz enebour ne welas e zeulioù !...
Desk d'az taou vab kerzed dalhmad en e roudou,
Desk deze karoud Breiz ! Ra vint, dreist-oll, tud kreñv,
Prest da veñji o zad, pa blijjo gand an Neñv,
Prest da zivenn o bro hag on Erminig wenn...
Red eo ma vint o-diou glan ha gwerh da viken !!!

VI

En o hastell, a-hont, tost d'o mamm intañvez,
Daou vab Morvan-ar-Meur a greñva beb devez
Ha, beb devez ivez, en o halon dener,
E kresk ar gasoni 'eneb an Deboner,
'Eneb Bro-Hall, 'eneb oll enebourien Breiz...
Kalon o zad, a-bez, eo a lamm en o hreiz !!!

Gand an daou vugel-ze, gra fouge, Breiz-Izel,
Daou vab gwir da Vorvan int !... Er henta brezel,
E weli ez int c'hoaz a ouenn on tadou-koz...
Fiziañs enne, va Breiz !... Ro deze, da hortoz
An devez ma vo red mond d'ar hann adarre,
Da vennoz, da oll zoñj ha da oll garante' !...

Dindan galloud Bro-Hall, Breiz-Vihan pell amzer
A chomas daoubleget !... Re yaouank, re zister
E oa c'hoaz bugale ar Roue braz Morvan
Evid he zenna krenn a zujidi, a boan...
Mez, eun deiz, e klevjont o halon o tridal
Gand hast da vond, d'o zro, da stourm 'eneb Bro-Hall.

« Poent eo, a lavaras d'e vreur ? Nevenoe,
Diskouel da Garl-ar-Moal⁴⁶ ez eus c'hoaz eur Roue
O ren ar Vretoned, ha n'en-deus spont ebed
O vond da stourm outañ, hag ouz e zoudarded !... »

Ha setu an daou vreur o vond war-zu Bro-Hall,
War o lerh Breiziz oll, o banniel o nijal,
Banniel an Erminig, ledan ha lugernuz,
Ha gwenn evel an erh dindan an heol skeduz !!!

O vond da stourm, Breiziz a gane en eur vouez
Barzoneg kaer Morvan, a glever aliez
Kana c'hoaz en or bro, war ar mêz hag e kêr...
'Barzoneg stourm Lez-Breiz", er stumm-ze hen anver !
Meuleudi, da "Lez-Breiz", Gloar, enor da viken !!!....
Eun devez goañv, a-hont, e goueled eun draonienn,
Anvet "Traonienn Ballon", eur stourm a hoarvezas,
Hag, en deiz-se, d'he zro, va Breiz a hounezas !!!

Ch. Gwennou

⁴⁶ **Karl-ar-Moal** : Notenn gand an oberour : Karl

Kana c'hoaz en or bro, war ar mêz hag e kêr-ar-Moal, mab Loeiz an Deboner, hag Impalaer Bro-Hall war e lerh (Pe, hervez an Istor, *Impalaer broiou ar Huz-Heol*). Notenn : e gwirionez e oe krouet gantañ ar Frañs, gand e le e Strasbourg e 843.

Pariz, e miz Here 1894.